

AN EKONOMIEZH-KELC'H e servij an embregerezhioù



An tolpad-kêrioù a sikour an embregerezhioù da chañch a-fet mererezh an danvezioù, energiezh ha monedone.

Kemenn d'an embregerion a garehe digreskiñ o dilerc'hioù, produiñ tredan, gwellaat beajoù mont-dont o gopridi... Get an tolpad-kêrioù e vez kinniget servijoù digoust evit gwellaat implij o danvezioù. Diagnostikoù, abadennoù-kizidikaat, taolioù-sikour... a ginnig an tolpad-kêrioù evit harpiñ an embregerezhioù da chañch akustumañs àr deir zachenn : mererezh an danvezioù, energiezh ha monedone. An ekonomiezh-

kelc'h zo he fal produiñ madoù ha servijoù dre ober get bihanoc'h a zanvezioù diaoz hag a vammennoù energiezh, ha kreskiñ askorusted an embregerezhioù àr un dro. Ur feson eo da wellaat kevezusted an embregerezhioù ha da grouiñ degouezhioù da ziorren marc'hadoù nevez. ♦

🌐 Evit gouiet hiroc'h ha lakaat e anv : www.entreprendre-golfedumorbihan-vannes.bzh/economie-circulaire

CHAÑCHET EO DEIZIOÙ DASTUM AL LASTEZ !



Adal ar 6 a viz Genver e chañcho deizioù dastum al lastez. Evit gouiet deizioù dastum bailhoù al lastez-ti hag al lastez adaozadus e roomp emgav deoc'h e lec'hienn internet an tolpad-kêrioù ma c'hellot pellgargiñ deiziadur dastum 2020. Ur gartenn etreoberiat zo ivez ma c'hellot lec'hiiñ ho ti evit gouiet pegoulz e vo dastumet al lastez. ♦

🌐 Gouiet hiroc'h : www.golfedumorbihan-vannesagglomeration.bzh



Ar ar bajenn gentañ

Bout zo unan ha n'en deus ket graet van em c'hlebiñ evit golo ar magazin 360 ! Patrice an hini eo. Strimpet e oa bet dour evit skeudennaouiñ an teulid gouestlet da vererezh an dour er c'hornad. Da lenn p.12.

📷 Razh ar poltredoù er magazin 360 enlinenn.

ATALIEROÙ EVIT AOZIÑ ABADENNOÙ HEP LASTEZ

Atalieroù a ginnig an tolpad-kêrioù evit kelaouiñ ha kendiviz a-zivout aozadur abadennoù hep lastez.

Daou atalier a oa bet dalc'het e fin ar blez : an eil a-ziàr diveskiñ al lastez hag egile a-ziàr ar gobeledoù hag al listri a c'heller adimplij. E-doug an trimiziad-mañ e vo kinniget daou atalier nevez get an tolpad-kêrioù evit gwelet penaos aoziañ abadennoù hep lastez. D'ar Merc'her 15 a viz Genver e vo an atalier kentañ a-zivout ar pretierezh adal penn-kentañ ar chadenn (pourveziñ) betek ar fin (foraniñ netra), ha d'ar Merc'her 5 a viz C'hwevrer e vo an eil a-zivout an adimplij hag ar c'henlodiñ : ur strategiezh c'hounit evit chom hep kalavriñ. Da-geñver ar c'hejadennoù-se e c'hello an dud diviz asabl àr ar fesonioù d'ober, ar soñjoù mat pe an diaesterioù o deus bet.

Gopridi, youlidi, dilennidi, gwazourion ar c'humunioù... razh an dud emleget a bell pe a dost e aozadur abadennoù er c'hornad a c'hello kemer perzh en atalieroù-se. Ar pal a vo intentiñ kudennoù meriñ al lastez, gouiet petra eo an diskoulmoù hag anavouet an ostilhoù. Un dro e vo ivez da gavouet



hentoù nevez d'ober gwell.

E sez an tolpad-kêrioù, e Gwened, e vez dalc'het an atalieroù, etre 3e30 ha 5e30 pe etre 6e hag 8e. ♦

Betek al Lun kreisteiz e-raok an dalc'h e c'heller lakaat e anv, enlinenn pe dre ar 02 97 68 33 81.

KENTELIOÙ FITBALL E GREGAM



Evit reizhiñ ho emzalc'hioù fall, reutaat gouriz ho kof, gwarantiñ ho kein ha kigeniñ dousik ho korf en ur ober bourrapl, ec'h eus abadennoù fitball kinniget deoc'h e kreizenn fitness poull-neuñval Aquagolfe Gregam. Àr-bouez ur vell jiminas vras e reer embregadennoù reutaat ha dic'hourdiñ, evit klask ar c'hempouez, nerzhekaat ar c'higennoù ha lakaat ar c'houbloù da labourat. Digor d'an dud daet eo ar c'hentelioù kaset en-dro get un desaver, d'ar Merc'her etre 9e30 ha 10e15 (56 € an trimiziad). ♦

Gouiet hiroc'h ha lakaat e anv : 02 97 66 78 62.

Berr-ha-berr

DEOMP DA SALOÑS AN TOURISTEREZH HAG AN DIVERRAÑSOÙ NATUR

Adal ar 27 betek an 29 a viz Meurzh e vo c'hwec'hvet dalc'h Saloñs an touristerezh hag an diverrañsoù natur. Tri devezh evit gober anavedigezh get paot mat a lec'hioù get ur pal touristel, en o mesk Breizh, laket da gannadourer ar saloñs a vo dalc'het er blez-mañ e park Chorus Gwened. Abadennoù, diskouezadennoù ha staliou-tañva a vo e-pad an dibenn-sizhun. Get an tolpad-kêrioù e vo kinniget e oberoù er c'hornad ha laket an dud da c'hounit mordreizhadennoù àr vourzh un Treizhour Bihan, àr e vorlinennoù etre Sant-Armael ha Sine hag etre Gwened ha Sine. ♦

Mont a-barzh digoust evit an holl
🌐 www.salon-tourisme-bretagne.com

UR VODADEG STUMMIÑ A-BEP-EIL

D'an 11 a viz Meurzh, da-geñver Nevezhañv an embregerezhioù, e vo aozet un « alternance meeting e Gregam » get an tolpad-kêrioù. An eil dalc'h-mañ a ziskouez ec'h eus dober a lakat ar studierion e darempred get embregerezhioù ar c'hornad. Ur speed-meeting (emgavioù prim) a vo aozet ivez evit mavo aesaet an darempredoù, oc'hpenn atalieroù perzhiiñ (staliou-labour) ha gweladennoù heñchet kement ha lakaat an dud da gendiviz ha d'anavouet micherioù hag embregerezhioù ar c'hornad. ♦

🌐 **Programm klok e :**
www.golfedumorbihan-vannesagglomeration.bzh

Kenberc'henniezh : sikour ar re wanañ

Gober labourioù pa vez mall-bras, kempenn ha dizarbenn ar gwanderoù, deskiñ d'an obererion : a bep sort e ra an tolpad-kêrioù àr dachenn ar genberc'henniezh. Amañ e vo displeget hiroc'h deoc'h.

Tost ur palefarzh a lojerisou an tolpad zo kenberc'hennet. Labourat a ra an tolpad-kêrioù àr bep tachenn evit ma trohe mat an traoù er c'hendioù beviñ-se. Sikour a ra ar c'henberc'henniezhioù get an diaesterioù brasañ evit gober labourioù mallus, roiñ skoazell d'ar re wanaet kuit na vehe gwashoc'h c'hoazh ar gwastadurioù ha deskiñ d'ar genberc'hennet donet da vout gwir obererion en o c'hendioù.



Renevezadur ur genberc'henniezh get skoazell an tolpad-kêrioù.

■ AG AL LABOURIOÙ MALLUS D'AL LABOUR DIZARBENN

Evit gouiet peseurt kenberc'henniezhioù a c'helle bout gwanaet ha penaos e emdro ar savadurioù, e labour an tolpad-kêrioù da sevel un arsellva. Darn obererion a gemer perzh el labour anavouet-se evel an ADKL (Ajañs-departamant evit ar c'helaouiñ àr al lojiñ), ar sindikoù micherel, ar genberc'hennet, ar brenerion nevez... pa gasont doare d'an tolpad-kêrioù hag a brizia an ezhommoù e-raok termeniñ petra a vo ar gwellañ d'ober hervez ar blegenn. An ostilh kentañ a c'heller ober getoñ eo an oberiadenn programmet evit gwellaat an tier kenberc'hennet aet da fall (OPAH CD). Ar programm-se zo soñjet evit ar c'henberc'henniezhioù get an diaesterioù brasañ evit o adlakat e stad vat : gober labourioù mallus, lakat an annezidi e surentez, reneveziñ ar savadurioù penn-da-benn...

Evit ar c'henberc'henniezhioù gwanaet, evel ma lârer, ec'h eus ag ur programm oberoù dizarbenn ha skoazelliñ ar genberc'henniezh hag a zo e bal gober un dra bennak kent na vehe re a ziaesterioù ha diwall na vehe ar savadurioù e stad re fall. En degouezh-se e ro harp an tolpad-kêrioù kentoc'h evit aozañ ar mererezh ha gwellaat mont en-dro diabarzh ar genberc'henniezh. Er fin, ar c'henberc'henniezhioù n'hellont bout skoazellet get stignad ebet a vez kaset d'an ADKL, karget da zoareetaat ar genberc'hennet ha d'o aliiñ evit meriñ mat o c'henberc'henniezh.

■ UL LABOUR A-STROLL

E penn-orin ar skoazell-se : ur studiadenn kaset da benn e 2016. Ur stad ag an traoù a oa bet graet get an tolpad-kêrioù diàr ur standilhon skouerius ag ar c'henberc'henniezhioù. Stadet e oa bet gwanderoù ha muioc'h c'hoazh get lod : mererezh ebet, gwastadur ar savadurioù, kresk ar fakturennoù dibae, digresk ar genberc'henniezh àr marc'had ar madoù diloc'h... Neuze e oa bet divizet gober un dra bennak asamb'l get Ajañs vroadel an annezidi (ABRA) ha lakat ostilhoù oberiant àr-sav. Daou vlez àr-lerc'h e oa bet roet lañs da « Steuñv intrudu ar genberc'henniezh » get ar Stad, ha setu kadarnaet obererezh an tolpad-kêrioù ha degaset ostilhoù oc'hpenn dezhoñ. Er mod-se ec'h eus bet gallet kreskiñ ar skoazelloù evit diskoumiñ an traoù e lod kenberc'henniezhioù.

Kalz a vern an ostilh skoazelliñ, ar pezh zo hollbouezus eo al labour a-stroll kaset da benn get razh obererion ar genberc'henniezh (kuzulioù sindik, sindikadoù ar genberc'hennet ha sindikoù). Evit lakat ar genberc'hennet lodek e buhez o c'henberc'henniezh e vez aozet atalieroù tematek digoust get an tolpad-kêrioù, e kenlabour get an ADKL, « evit kompren gwell ar c'henberc'henniezh ». ♦

ATALIER KENTAÑ

Reneveziñ energetek ar genberc'henniezh, d'al Lun 13, 20 ha 27 a viz Genver, da 5e30, e sez an tolpad-kêrioù.

Lakat e anv evit an heuliad tri atelier : inscription-atelier-copropriete@gmvaggio.bzh

UN DREUZELL EVIT AR POL ESKEMM LIESVODEL

Da-geñver raktres ar pol eskemm liesvodel e vo kempennet un dreuzell etre ar c’harter Norzh-Gar ha kreiz-kêr Gwened. Geti e vo liammet an daou garter kenetreze ha fonnaploc’h e c’hello an dud monet da savadur beajerion an ti-gar. Ur bazenn a bouez e vo an dreuzell-se e raktres ar pol eskemm liesvodel rak hervezi e vo lec’hiet an akipamantoù arall a chomo da sevel. Ur genstrivadeg a-ratozh evit termeniñ petra e vo stumm ha gobari an dreuzell a vo roet lañs dezhi er blez-mañ evit ma vo laket àr-sav adal 2024.

Oc’hpenn an dreuzell-se e raktreser adkempenn an tachadoù foran en àrdroioù an ti-gar, sevel ur gar kirri-boutin nevez, bout muioc’h a blasoù evit parkiñ ha re miret evit koumananterion an TER, adrummiñ ar c’haeou hag adaoziñ savadur ar veajerion, evit gellet kinnig ar muiañ a servijoù ar gwellañ d’an implijerion a dremen bemdez pe a-vareadoù. Er raktres ec’h eus lec’h ivez evit stagiñ ar beloioù, evit gober un arsav berr, evit an taksioù hag ar feurmerion kirri-tan, evit

ma tay ti-gar Gwened da vout ur pol eskemm liesvodel e-tailh da respont da ezhommoù monedone ar pep brasañ. ♦

🌐 **Raktres ar pol eskemm liesvodel skeudennet er magazin 360 enlinenn.**



HARPIÑ AN DUD BERR AN ARGANT GETE



An dud berr an argant gete ha ne zaont ket a-benn d’em deniñ o-unan a c’hell goulenn skoazell evit o difraeoù get ur guzulierez àr an ekonomiezh sokial ha tiegezhel. O sikour a ray da vout emren en-dro ha da gavouet kempouez en o buhez, da zeskiñ meriñ o budjed, d’e lakaat a-gempouez ha da rakwelet an dispignoù. Gelliñ a ray labourat get bodadoù an dreistendeleadur ha mar bez fakturennoù ha feurmou dibae goulenn ma vo ampellaet an termenou paeiñ ha laket ur steuñvenn daskoriñ e plas. Labourat a ra ar guzulierez-se evit Kreizennoù obererezh sokial ar c’humuniou (Brandevi, Gregam, Sterwenn, Pleskob, Sant-Nolf, Sulnieg, Surzhur, Lokeltaz, Lokentaz ha Trevlean) da glokaat kefridi al labourizion sokial arall. ♦

Evit lakat emgav : monet e darempred get Kreizenn obererezh sokial ho kumun.



50 %

Setu an dregantad ag an dilerc’hioù a gaver e-mesk al lastez-ti hag a c’hellehe bout talvoudekaet :

Diàr 100 kg lastez ec’h eus 21 kg o dehe gellet bout adaozet ma vehent bet laket er bailhoù diveskiñ ha 29 kg lastez organek o dehe gellet bout rotelet. ♦

🌐 *Mammenn : danevell blez 2018 al lastez – rummatadur graet e miz Genver 2017*